

**Charlez Gwennou.** (bet ganet e Lezardrev e 1851, marvet e Vitry-sur-Seine e 1915).

**Re a skiant on-eus pe Yann ar Mañcheg o vond da Bariz,** bet embannet e 1896.  
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

### Re a skiant on-eus

Chomit, chomit e Breiz

Eul labourer-douar, Yann ar Mañcheg e ano, ganet hag o chom en eur vereuri gaer a ganton Perroz-Kireg, a lavare, eur beurevez, o tihuni, d'e wreg yaouank, Matelina, merh Tual ar Hemener :

-« Matelina, va gwreg, en noz-mañ, etre diou gouskadenn, eun dra a zo deut em spered !... »

-« Petra ah-eus-te soñjet, Yann ?... »

-« E feiz, n'edom ket greet, emichañs, evid chom da viken amañ, e-kreiz ar parkou, e mereuri Koad-Haleg, da *Frita kernez gand paourentez !...* Re a skiant on-eus, war va zoñj !... koulz ha kant a dud all, eh hellfem gounid arhnat ha dond da veza pinvidig-braz e Pariz !... »

-« Jezuz, Maria, Credo ! Petra a larez-te, Yann gêz ? », a respontas Matelina, he daouarn kroazet ganti war he hov... « Da Bariz e fell dit mond, ha da ober petra, va Doue ?... »

-« Da ober petra ?... N'eus forz da betra !!! Ned om ket ni tud a skiant, evel ne vez ket kavet nemeur er hanton ?... M'hen lar dit, ni a gavo an tu da zastum arhant a-zahadou e Pariz... Neuze ne wiksin-me nemed dillad mezer fetiz, ha te az-pezo togou seiz, bokedou ha perlez e-leiz warneze... Kleved mad a rez, Matelina ?... »

-« Ha gwir, Yann, am-bezo-me traou ken kaer ha ma larez ?... »

-« Kaerroh c'hoaz, penn kaled ma'z out... Tud a skiant-vraz eveldom, n'ez eus tra re gaer evite !... »

-Ma ! Deom eta da Bariz, Yannig, ha raktal, ma karez. »

Eun nebeud deziou goude, Yann ar Genaoueg (ho tigarez, mar plij ! Yann ar Mañcheg eo am-boa c'hoant da lavared !), a reas gwerza e di, e barkou, e varh, e garr, e alar, e vuoh, e havr hag e oll vinviou all, a lakaas gwele, armel, taol, kador, ha listri kegin en "hent-houarn", d'o has en e raog da Bariz, a baeas chopinad da hemañ, chopinad da henhont, a lavaras kenavo d'e oll gerent ha mignoned, o laroud deze dond d'hen gweled da Bariz, e leh, emezañ, ne vije ket pell kent dond da veza da nebeuta "Milioner".

Matelina ar Mañcheg, merh Tual ar Hemener, a lavare kemend-all d'he homerezed, hag a flabote, evel eur bik vorn, o tiougani deze an oll draou burzuduz a dlee degouezoud ganti ha gand he fried Yann... Hag e oant eno oll, beteg ar vestrez-skol, digor frank ganti he genou, skouarn ha lagad, o selaou ar wreg yaouank pennfollet...

Greet o himiad gante, an daou-mañ a redas d'ar gar, mall braz gante d'erruoud e Pariz, e leh, war o zoñj, em a aour da zastum a-boezelladou, dreist-oll pa vezer, evelte, tud a skiant vraz...

O kuitaad ar *harr-dre-dan*, Yann a stagas da lared, en eur skei war e dal :

-« Da be leh eh aim, da gomañs ? »

Matelina hen tennas a-boan raktal :

-« Kenta tra on-eus d'ober eo mond da zebri... N'out ke te euz an ali-ze, Yann ?... »

-« Eun ali mad ! eme Yann. Deom da zebri eta... A-hend-all ne dalv netra mond da weled an dud, pa vez goullo ar hov. »

Mond a rejont eta d'eun ostaliri e leh e vez roet da zebri, ha, daoust n'o-doa debret nemed nebeud a dra, e koustas deze ugent real.

-« Ugent real daou damm pred ! eme Vatelina. Gand kemend-all or-bije bet peadra da veva e-pad eur zunvez a-bez ! »...

-« Ker, ha ker kaer, evid gwir, eo beva e Pariz, a respontas Yann : mez, n'eus forz, pa hounezet aour, evel ma'z eom d'ober on-daou !... »

-« Dond a rez da weled on "Député", Matelina ?... »

-« Ya, a-walh », eme homañ.

Hag i da vond !

-« Deiz mad deoh, Aotrou an Député ! eme Yann. N'anavezit ket ahanom ?... »

-« Ma feiz, nann, va den !... »

-« Petra ?... N'anavezit ken Yann ar Mañcheg, euz a Goad-Haleg, en kanton Perroz-Kireg, hag e wreg, Matelina ar Hemener ?... Koulskoude, deiz ar votadeg, am-eus roet va mouez deoh !... »

« Mad, mad, va den ! Kendalhit, kendalhit, hag e reot plijadur din ! Hag evel-se, ez oh deut d'am gweled ? Se, avad, a zo brao euz ho perz !... »

-« N'eo ket gwir 'ta ?... E feiz, ya, deut om, Matelina ha me, d'ho kaoud, evid ho pedi da glask deom peb a blas, peb a garg mad, rag c'hoant on-eus da chom, diwar-vremañ, e Pariz... »

-« Kalz well ho-pije greet, Yann, o chom e Koad-Haleg !... »

-« Bremañ, Aotrou an Député, eme ar genaoueg, e welan sklêr a-walh n'anavezit ket ahanom... Kalz re a skiant or-boa evid chom e Koad-Haleg... Hag a-hend-all, an dra-ze bremañ n'o ken *posubl*... Gwerzet on-eus ti, parkou, buoh, karr, marh, hag oll kement or-boa... »

-A !... Ma feiz, va zud keiz, grit evel ma plijo deoh d'en em denna a boan. Ned on ket eur rener *ti da glask labour d'an dud*... ».

-« Ar foeltr ganen, penn-botez ma'z on !... Ankouaet krenn am-boa ez eus e Pariz tier evel-se. Deom buan, Matelina ! An tier-ze, emichañs, ned int ket greet evid al loened !... Kenavo, Aotrou an Député !... »

-« Kenavo, Yann ; ha tro vad deoh ha d'ho kwreg... Me 'gred avad ho-pezo keuz, kent pell, da veza kuitaet Koad-Haleg !! »

Hag i da vond d'unan euz an tier-ze, anvet e galleg *Bureau de Placement*, da lavared eo d'eun ti, en hini<sup>1</sup> ar mestr en em garg, *pe a ra van d'en em garga* da

---

<sup>1</sup> en hini : e pehini, er skrid orin. Fazi boaz en amzer-ze.

gavoud *plasou* a-zoare d'ar vicherourien, hag ivez d'an dud divicher, en em gav heb labour, gand ma vezo en o godell eur yalh koveg da vad.

Hogen, an ti e-leh m'erruas Yann ha Matelina, a oa treud ha disneuz iskiz, koulz an diavêz hag an diabarz anezañ... Biskoaz, 'michañs, an heol ne ziskennas ennañ... Ar mogeriou, mouest ha louedet, a laoske dre-oll flêr ar maro... Ar skalier, hanter-vrein, a oa sonn ha teñval evel eur skalier toull-bah dindan an douar, ha nehet-braz e oa Matelina o pignal ar skalier-ze, rag aon da goueza, bep kammed.

-« Ba ! eme Yann, *n'eo ket ar gaoued a vev an evn*, ha, marteze, perhenn an ti hudur ha louz-mañ a zo deg gwech, dre e vadou, en tu all d'ar fri-hir, on Député, an diaoul d'hen taga ! »

Pignet gante, o torhweza<sup>2</sup>, pemzeg pazenn ha kant, e tegouezjont war eur pondalez teñval evel ti an diaoul, hag e skojoent war eun nor a weljont diraze, e oa skrivet warni<sup>3</sup>, e gwenn, **Alan al Louarn**, *ti da glask ha da gavoud plasou a hobr mad evid gwazed ha merhed a beb micher, hag heb micher zoken !...*

Digor an nor, eun den gwisket evel eur pillaouer, eur hoz boned war e benn, lunedou glaz war e fri, a houlennas digand Yann :

-« Petra a fell deoh, ha piou eo ar vaouez-mañ ? »

-« Aotrou kêz, eme ar Mañcheg, ni a zo deuet da Bariz, va gwreg ha me, evid klask labour, rag c'hoant kaer on-eus da hounid arhant !... En or bro n'hellem ket dond a-benn a gement-se, hag e fell deom kavoud *plas* e Pariz. A-hend-all, re a skiant or-boa evid chom e Koad-Haleg !... »

-« Deuit em hambr, eme Alan, ha me 'gred e kavim hebdale ar pezh a glaskit !... Pe vicher eo hoh-hini, va den ?... »

-« Me, aotrou, eme Yann, a oa merer, a-hont, e Koad-Haleg, e kanton Perroz-Kireg !... »

-« Ha c'hwi, itron ?... »

-« Me, a respontas Matelina, lorh enni da veza galvet *Itron* gand eun Aotrou braz e Pariz, me a aoze ar boued, a vouete ar zaout, ar hezeg, an deñved, a yee da ganna an dillad, a gase toaz d'ar forn, a yee d'ar marhad da werza lêz, viou, amanenn, a gempenne an tiegez, evel ma tle peb mererez ober : n'eo ket gwir, Yann ?... »

-« Mad, mad ! eme al Louarn. Me am-eus hoh afer !... »

-« Laret mad am-oa dit ! eme ar Mañcheg... Tud a skiant eveldom ne chomont ket pell dilabour e Pariz !... »

-« A-wechou !... Koulskoude, me a ray kement a hellin evid ho tenna a boan e berr-amzer... Ha setu, evel dre eur mirakl ez oh deuet d'am gweloud hirie. Bez' am-eus evidoh, ma den, eur plas a *baotr Karr* (amañ, e Pariz, e lavarom *cocher*) gand eur gopr a gant lur beb miz, en eur hastell, hag eur plas a geginerez, er memez ti, evid ho pried, gand eur gopr a hanter-kant lur beb miz... Ma fell deoh mond da weloud an daou blas-se, me a lavaro deoh peleh ema ar hastell, pa ho-pezo roet din, peb unan ahanoh, evid va foan ha va skrituriou, peb a bez ugent real !... Da gemer raktal, pe da lezel !! »

---

<sup>2</sup> o torhweza : ? Marteze "o torhwenial".

<sup>3</sup> e oa skrivet warni : war behini e oa skrivet (er skrid orin).

Hag i da rei d'al Louarn daou bez ugent real, ha da vond, en eur red, d'an ti en-doa laret deze mond euz e berz... Allaz, re ziwehad eh errujont, rag, abaoe an deiz diagent, an Aotrou en-devoa gopraet eur paotr-karr hag eur geginerez.

En deiz war-lerh, e tistrojont da weled al Louarn ; hag hemañ, goude beza bet digante daou bez ugent real, o hasas d'eun ti all, e leh, emezañ, e kavjent heb mar beb a blas.... Allaz, ne gavjont netra, nemed mevelien ha mitizien d'ober goap aneze.

E-pad pevar devez dioustu e tegouezas gante ar memez tro, hag e-pad pevar devez dioustu e rojont beb a bez ugent real d'al Louarn...

-« Setu dispignet ganeom daou-ugent lur da baea ar hoz laer-ze, eme Vatelina, ha gopr ebed n'on-eus kavet !... »

-« E feiz, a respontas Yann, me a gav ganen en-deus c'hoant ar hov-yod da skarza krenn or yalh ; ha d'ober c'hoariell ganeom... Me ne fell ket din mond d'hen gweled. »

-« Na me kennebeud... Penaoz ober koulskoude, Yann gêz ! An arhant a ya buan e-biou, ha netra a vad ne gavom... Gwell kaer, war va zoñj, or-bije greet o viroud on traouigou hag o chom da labourad douar Koad-Haleg !... »

-« En an' Doue, tao ! eme ar hoz merer. N'on-eus-ni ket kalz re a skiant da zsitrei da Goad-Haleg, da derri or horv o trei mein hag o troha buzug, e parkou ar goz vereuri-se ?... Red mad eo gortoz eun nebeud deiziou ; kent kavoud labour en eur gêr evel Pariz... Mez, pa on-devo kavet eur gopr, ne vim ket pell o tastum ar pezh or-bezo dispignet, ha kant gwech ouspenn !... An dud a skiant evel dom e teu bepred an taol da vad gante !... N'eus nemed gortoz heb koll kalon !... »

-« Doue r'az klevo, Yann !... Mez ar yalh a skañvaa, ha, m'hen lavar dit, gwall hir e kavan-me an amzer !... »

Evid troha berr, an ostiz e teuent bemdez en e di<sup>4</sup> da breja ha da loja, da hortoz ar pezh o-doa lakaet en hent-houarn da zond deze da Bariz, a gavas da Yann eur plas, e ti eur fermer kezeg ha kirri, evid beza paotr-karr (e galleg "*cocher de fiacre*"), ha da Vatelina eur plas da nêtaad ha da ziwall eun ti "*priveziou evid an oll*" (e galleg "*cabinet d'aisances public*"), gand eur gopr a bevar real bemdez...

Ar baotred-kirri, e Pariz, o-deus o skol hag o renerien, evel an dud yaouank a fell deze mond mond da ofiserien war vor o-deus o lestr-skol, e ano, mar am-eus soñj mad,, an "Iphigénie". Skol ar baotred-kirri a zo eur peul-karr war beder rod hag a zaou a gezeg, e vez gwelet o redeg amañ hag a-hont, e kêr, eur strollad tud diwar ar mêz ennañ, peb a flotantenn hir war o hein hag peb a dog-uhel lien koaret pe ler bervet war o fenn.

Eur hoz "paotr-karr" a zesk deze ar stumm da gas ha da vlenia eur harr e Pariz, ha penaoz en em gemer evid kavoud o hent e ruiou ar gêr vraz. Gwech an amzer, ar harr-skol a chom en eur hroazhent bennag da rei eun tamm diskuiz d'ar hezeg, ha neuze e ro ar rener kentel d'e skolaerien, dirag eur bobl a dud dastumet en eun taol en-dro dezañ... Gwaz d'an hini na respont ket hervez soñj ha grad-vad ar mestr ! Henez e vez roet dezañ eul lesano divalo bennag, hag an oll a hoarz a-bouez-penn diwar e goust, hag a ra goap anezañ didruez !

---

<sup>4</sup> e teuent bemdez en e di : e ti pehini e teuent bemdez (er skrid orin).

Goude beza bet er skol e-pad eun teir zun bennag, Yann ar Mañcheg a oe lakaet da "baotr-karr", hag eur beure, eh eas gand e garr hag e varh, da vale e kêr da weled hag eñ a gavje eur beajour bennag da gas amañ pe du-hont.

-« Eun devez kaer, emezoh, a reas Yann, emichañs ? »

-« Ya da ?... o hounid bemdez kement hag eñ, perhenn mil skoed leve ez afe buan da glask e voued... »

Setu penaoz e tegouezas an dro gand or hanfard o staga gand e vicher nevez.

Kent ma oe roet dezañ eur harr hag eur hoz marh, Yann gêz a rankas lakaad c'hweh skoed e dorn e Aotrou... Ahanta pa zistroas, fêz ha skuiz-marzo, da gas e garr hag e loen d'ar marchosi, goude beza klasket ha diglasket dre-oll tud da gas en kêr d'ober eur bale bennag, n'en-devoa gounezet nemed seiz lur ha daou real ! Kaerra gounid, va zud vad ! Deg lur ha daou real tennet euz e hodell...

Eun heveleb darvoud a hoarvezas gand ar paour-kêz, pemzeg devez diohtu.

Ha, koulskoude, war e zoñj, e oa eun den a skiant vraz hag a spered lemm !

A-benn ar pemzeg devez-se, Yann a oa hirraet mad e vuzellou, ha ne lavare, koulz lared, ger ebed... Krog e oa da zoñjal n'eo ket a-walh beza eun den diouz an dibab evid dastum e Pariz arhant hag aour a-zahadou...

Matelina ne ree ket ivez kalz a goar en he *zi-priveziou evid an oll...* Nag a wech e tegouezas ganti, e leh lakaad gopr he devez en he godell, rankoud tenna diouz he yalh peadra da baea d'an Aotrou ar pez a veze dleet dezañ, war-bouez en em lezel da veza laeret gand an dremenidi !

Ne ree ar baourez-kêz kont vad ebed... Da hemañ e roe re a voneiz ; digand egile ne gemere ket a-walh, hag ar soaon a yee aliez, heb gouzoud dezi, e godellou ar re a zeue d'azeza en he *friñveziou*.

Yann, am-eus laret, abaoe ma wele kov e yalh o vihannaad bemdez, a oa deut da veza gozig heñvel ouz eun den mud.... Matelina, a vad, pa zistroe d'ar gêr, ne dave ket.

« Aze avad ah-eus greet eun taol kaer, emezi, o tond hag o tegas ahanon ganit da foeltri gand an naon, d'ar gêr daonet-mañ !!! Pa zoñjan az-poa re a skiant, hervez da lavar, evid chom e Koad-Haleg, da labourad douar !... Kaerra taol am-eus greet o senti ouz eur genaoueg evel dout !... »

Eun abardaez, eur paotr hent-houarn a zeuas da lavared dezo e oa o annez er "gar", abaoe pemzeg devez, ouz o gortoz.

« Kasit e eno en-dro da Goad-Haleg, a lavaras Maetlina ; droug ar gounnar enni... Skuiz a-walh ez on-me amañ, e leh emañ e riskl da vervel gand an naon... Te, chom, mar plij dit... Me a fell din, heb dale tamm pelloh, distrei d'ar gêr !... »

Yann, hir e vuzellou, a heulias e bried.

Hirie emaint o-daou mevel ha matez e Koad-Haleg, a oa o zra gwechall.

Setu aze ar pez a hoarvez aliez, siwaz, gand an dud e kav dezo o-deus re a skiant evid chom da labourad douar, hag a ya d'ar hêriou braz, o soñjal dastum arhant hag aour a-zahadou....

Labourerien Vreiz-Izel, kemerit skwer diwar an daou skouarneg-mañ, ha chomit en ho parkou ! Eno, ho-pezo bepred peoh, yehed ha peadra da veva : er hêriou braz avad, ne gavfot aliez nemed poan, glahar, paourentez, kelñvejou a bep seurt.